

E garnizon Lannuon



Sei-tek de-vezh ha tri - wec'h miz E gar - ni - zon Lan - nu - on



Oa aet an Ao - trou da Ba-ris E gar - ni - zon, zi-gi-don-don E gar - ni - zon



Lan - nu - on

Ur plac'h yaouank diwar ar maez
E garnison Lannuon (bis)
Oa aet d'ar vilin un nozvezh
E garnison, zigidondon ,
E garnison Lannuon

`Toull ar vilin p'oa erruet
Ar miliner a oa kousket

Petra'zo ganeoc'h `n ho sarc'had
Ma erruit ken diwezhat

Kerc'h ha segal ha gwinizh du
Eman ar vilin war he zu

`Zo war he zu pe n'eman ket
Ho sac'had'c'hwi a vo malet

Ha dre ma kouezh ar greun er gern
Ar miliner a boke ferm

Ha dre ma kouezh ar greun er bank
Ar miliner a boke stank

Ha dre ma kouezh ar greun er sac'h
Ar miliner `boke d'ar plac'h

Hola hola `ta miliner
Torret'peus las ma zavancher

Kemenerien a zo er vro
C'hwi a glasko ha me baio

Seitek devezh ha triwec'h miz
Oa aet an Aotrou da bParis

A-benn ma tistroas d'ar gêr
'Vo chañchamant 'barzh ar maner

"Chañchamant zo er maner-mañ
Ha ma Intron, pelec'h emañ ?

- 'Mañ 'us e kambr an uhellañ
'Tommañ he mab an terriplañ

Ur paotr bihan glas e lagad
Ne oar ket piv ez eo e dad

E dad ne oar ket piv ez eo
M'hen dar' ar miliner e ve"

"Diboñjour dit 'ta miliner
Me zo deut da glask da gomper

- O ! da gomper me na yin ket
Kar ma milin zo war he boued

Kar ma milin zo war he bord
Hag aon am eus e vefe tort

- O ! artizaned zo er vro
Ma vefe tort-int a renko

Ma ouie mat 'ta miliner
Ne ve'z ket bet tad ha komper"